

Er Voraérion

Bu - hé er vo - rê - rion e zo trist er bed - man. Be - pred pell doh ou

zud é - dan glaù hag ar - nan, A - veit go - nit ba - ra, ba -

ra d'ou bu - ga - le, Ret é de - hé kui - tât ou bro a ga - ran - te - -

1

Buhé er voraérion e zo trist ér bed-mañ;
Bepred pell doh ou zud, édan glaù hag arnañ,
Aveit gonit bara, bara d'ou bugalé,
Ret é dehé kuitât ou bro a garanté.

2

Kenavo e larant ha chetu int ér vag;
N'é ket en ér eité d'ou dout ur galon goak,
Lakât e rant de ouél, lavagnon pé kalm-chok;
Araok breman, mem bag, araok, penn é kornog!

3

Bremañ ar er mor bras émant én ou unan.
Ne uéler a bep tu meid er mor hag en néañ;
Sertoh-sert é gouéliou atél er méz e huéh,
En houlenneu e foenu hag en noz du e gouéh.